


# EMSAV

MEZHEVEN 1968

*Keveadelaony  
Cultar*

Niv. 18



KELAOUENN BOLITIKEL

MIZIEK

Niv. 18 - Mezheven 1968

An niverenn : 2,00 F

Koumanant-bloaz : 20,00 F

Deraouiñ a ra ar c'houmanant e miz Genver

EMSAV

30, Place des Lices, 35 - RENNES

C.C.P. RENNES 2 460 10

---

T a o l e n n

Gouloù an amezeg zo gouloù bepred . . . . .	p. 161
An Emsav hag ar Vro (3) . . . . .	p. 165
Lizheroù p. 165, Lennadennoù p. 172, Darvoudoù	
p. 179, Kemennadenn a-berzh Poellgor-Leviañ	
<u>Emsav</u> p. 188, Kemenn a-berzh <u>S.A.D.E.D.</u> p. 188.	

## GOULOU AN AMEZEG ZO GOULOU BEPRED

"An dud ne reont nemet soñjal er pezh a c'hoarvez e Paris" a lavare deomp e miz Mae ur c'houer eus Kerne-Uhel, "koulskoude n'eo ket se a gaso an traoù war-raok dre amañ". Gwir eo, abaf, simudet e chome an dud dirak an tousmac'h a zirolle war bParis hag un nebeut kêrioù bras eus Frañs. Eurvezhioù hon eus tremenet holl e-tal hon transistorioù o c'hedal an darvoudoù, ha dezho hon eus gouestlet e-pad teir sizhun un darn vat eus hon divizoù, hol lizheroù hag hon emvodoù. Anat e vo moarvat roudoù eus kement-se war an niverenn-mañ eus Emsav.

Hag, e gwir, hor mad hon eus tennet eus an darvoudoù-se, eus ar perzh o deus reoù ac'hanomp kemeret enno, eus an darempredoù hon eus bet gant ar strolladoù a c'hoarie enno. Gouloù o deus taolet war an Emsav ha gwered o deus bet warnañ ivez.

Ur gouloù o tont a-ziavaez int bet ha seul briziusoc'h a-se, - ken prizius hag al luc'hskeudennoù tennet eus tu gin al Loar. Ha se evit meur a abeg.

Da gentañ hon eus bet aze tro da arvestiñ war hor goar ouzh un argerzhad dispac'hel war an dachenn. C'hwitadenn zo bet, met un eostad puilh a anaoudegezhioù hon eus gallet dastum war amlegadoù un dispac'h hag ivez war arbennoù an dro vat pe fall anezhañ.

D'an eil hon eus bet tro da arvestiñ ouzh emzalc'h ar boblañs e Breizh. Betek pe boent e veze lusket gant al levezonoù, ha petore rummoù eus ar boblañs a veze lusket, ha perak. E pe geñver e oa heñvel emzalc'h poblañs Vreizh ha poblañs Frañs, hag e pe geñver e vane disheñvel. Ha penaos dezrannañ an disheñvelderioù-se : pe berzh en doa enno an devoud Breizh, hag e pe feur en doa perzh evel devoud ergorel hag e pe feur evel devoud dangorel. Ha penaos meizañ, en disheñvelderioù-se, ar pezh na denne ket war-eeun d'an devoud Breizh :



penaos e ra Paris an Istor ha penaos e trevez Breizhiz an Istor graet gant Paris. Ha penaos seurt isdiorreadur ne c'hell ket bezañ pareet eus an diavaez, met gant Breizhiz o-unan.

D'an trede hon eus bet tro da arvestiñ ouzh emzalc'h an emsaverion hag al luskadoù brezhon. Hag ar pezh hon eus gwelet zo bet azonus-kenan. Evel m'en em zisparti ar molekul lakaet en ur vaezienn dredan, darn o vont diouzh un tu, darn all o vont diouzh un tu all, hon eus gwelet an emsaverion, lakaet e maezienn an darvoudoù, o loc'hañ diouzh roudoù disheñvel. E-pad un nebeut devezhioù e voe anat bevenn an Emsav, - a dremen peurliesañ dianat dre ma'z eo ur vevenn etre an oberoù ha n'eo ket etre an dud. Hag anat e oa, entergorel, rak ar C'hallaoued o-unan he diverze : da Vrezhoned 'zo e lavarent : "N'eo ket evit ho feukañ, met Indianed e vefec'h, n'hor befe ket muioc'h a striv d'ober evit intent ho toare da welout ar bed"; ar re-mañ a oa evito en tu all d'ar vevenn. Da reoù all e lavarent : "Perak e kollit hoc'h amzer evel-se o terc'hel ur skritell rannvroelour ?"; ar re-mañ a oa en hevelep tu ganto d'ar vevenn.

Ni a soñj n'eo ket fall tamm ebet m'o deus ar C'hallaoued merzet e oa Indianed, - da lavarout eo nannGallaoued, - ac'hanomp. Betek neuze edo ar senario evel-henn etre an Emsaver hag ar Gall : E - 'Me zo Brezhon, n'on ket Gall'. G - 'N'out ket mat ? Te zo Gall, evel an holl'. Hiziv avat, e tizolo ar C'hallaoued o selaou ouzh komzoù tud 'zo e Breizh, oc'h anaout ar vuhez a bleuskont hag ar bed a veizont, ne c'hell ket ar skritell c'hall dereout outo. Bihan dra, emezoc'h, evezhiadennoù difluket etre trinkañ ha marvailhat; tra abouez, emezomp, pa ziskouez eo deuet an Emsav war-c'horre a-benn an diwezh, n'eo ket ken evel luskad politikel, met evel devoud kevredadoniel.

Hag ez adlavaromp ar pezh hon eus embannet c'hoazh e lec'h all, diwar dri stur an Emsav :

- a) krouiñ ur framm evit bremañ hag an dazont;
- b) lakaat diwar vremañ ur gevredigezh da vevañ;

k) ren ur politikerezh war an dachenn bremañ.

An amkan b) eo an hini pouezusañ. Padal, hep ar framm, a zo an henter hag an eurier anezhi, ne c'hell ket ar gevredigezh mont pell, - met ret eo gouzout ez eus a-walc'h gant un eurvezh labour krouiñ framm evit dek mil eurvezh a labour genel kevredigezh. Al labour genel kevredigezh eo a grou an den brezhon nevez spurmantet gant hon amezeion eus ar Reter.

Un doare da vuzuliañ an emsaverzh a vez arveret paot en Emsav : klask gouzout betek pelec'h ez a goulennou, arc'hadurioù an dud a-fet pellaat Breizh diouzh Frañs. Derez mann : statu quo. Derez unan : digreizennañ. Derez daou : parlamant e Roazhon. Derez tri : Breizh emren en Europa Gevreat, h.a.. Ned eo ket faos ar seurt doare dereziata, nemet e sko e-biou. Ne ra kont nemet eus derez-pelladur Breizh diouzh Frañs, e-lec'h ober kont eus derez-nesadur Breizh outi hec'h-unan. Ur muzul nac'hel eo; gwashoc'h, pouezañ a ra ar skeud evit an dra. Hemañ eo ar muzul yael ha gwirion : pe bouez eo ar gevredigezh vrezhon nevez evit ma talvezfe ar boan reiñ dezhi ul lec'h dioutañ e-unan er bed ? Ma ne zeu ket a-benn da vezañ ul lec'h-krouiñ oberiek ha nerzhiek, ma ne zeu ket a-benn da vezañ estraget ul lec'h-hekleviñ d'al lec'h-krouiñ gall, neuze greomp peoc'h, lezomp ar grouerion da ziferañ tonkad an tamm douar-mañ, - Région de Programme, Province d'Europe, Etat Régional, - petra verno neuze d'ar re a chomo. Rak ar re o deus estreget gwad heklevourion en o gwazhied o devo graet pell 'zo o malizenn evit ul lec'h-krouiñ gwirion.

Setu perak ar poent k), ar politikerezh war an dachenn, a gompr-enomp disheñvel-bras diouzh ma vez komprenet boas. Ar re a laka en o freder kentañ pellaat diouzh Frañs, diouzh Paris, diouzh de GAULLE, a rank loc'hañ eus Frañs ha, dre-se, forzh pegen pell ma vent mennet da bellaat diouti, e chom merk Frañs war o hent hag al liv gall war o folitikerezh. Un doare loc'hañ n'eus ken : diwar ar gevredigezh vrezhon nevez, forzh pegen bihan ma ve c'hoazh.

Anat eo n'eo ket degouezhet ar gevredigezh vrezhon nevez gant ar



mare ma lavaro d'an ensavadurioù gall : poent eo lezel al lec'h da vat. Met ar mare-se a rank bezañ prientet diwar vremañ. Gant piv ? Gant ar gevredigezh vrezhon nevez hec'h-unan evel just. Ar gwir he deus da vezañ krouerez ha dieub war an douar a zo dezhi. Ar pezh a vank dezhi eo an nerzh. Dezhi da greskiñ neuze, da gemer nerzh, - setu ar pep sklaerañ eus ar politikerezh he deus da ren war an dachenn.

Hag ar politikerezhioù a bep seurt a vez renet war an dachenn vrezhon, emezoc'h, ha mat eo dezhi tennañ he mad anezho ? Ya, rak ar soudard en emgann a zebr ar boued a gav, ha paeañ a ra pa c'hell. Met ne ziwisk ket e lifre : forzh petra a reot, na guzhit ket ez oc'h ar gevredigezh vrezhon nevez.

Goude darvoudoù Mae e tifluk e Breizh luskadoù ha strolladoù politikel evel kebell-touseg goude an arnev. Reoù zo dedennus, reoù all binimus. Penaos en em zibab en o zouez ?

Soñjet hon eus ne oa ket fall reiñ un nebeut reolennoù evit ar re ac'hanomp a gemer perzh en emvodoù aozet du-mañ ha du-hont er vro dindan ur skritell vrezhon. Lezel a reomp a-gostez an emvodoù aozet gant ur gostezenn c'hall, chomet estren d'an ober brezhon.

Setu ar goulennoù a zleer kaout respont dezho kent pep tra :

a) Peseurt ster he deus ar gelennadurezh diskleriet en emvodoù-se e-keñver mennozioù-diazev an Emsav : daoust ha diskleriet eo ar pal da dizhout, ar Stad Vrezhon ? Daoust ha kinniget eo ar gevarzh-elouriezh evel meizad-diazev a-fet furm ar gevredigezh e Breizh ? (Aze e ranker goulenn spisadurioù, pa vez arveret ar galleg, rak dindan ar gerioù "social", "socialisme" e lakaer forzh petra er yezh-se). Ha degemeret eo ar brezhoneg unvan evel benveg meizañ ar strollad hag ar gevredigezh da zont ?

b) Piv eo an dud a ren an emvodoù foran ha peseurt fiziañs a c'haller kaout en o lavaroù, hervez o skridoù pe o oberoù kent, hervez o stummadur politikel brezhon ivez ?

k) Peseurt renk o deus an displegerion en aozadurioù a vrudont ? Pe framm eo an aozadurioù-se, pe gefridi, pe atebegzh o deus an displegerion enno ?

d) Pe dalvoudegezh o deus an emvod pe ar brezegenn e-keñver bruderezh e-touez ar boblañs ?

Tud stummet a welo raktal ez eo amsteriek ar gelennadurezh displeget dirazo, pe dalvoudus hervez an degouezh. Gant tud nebeut-oc'h stummet, pe gant re yacuank techet da splujañ e darvoudoù n'o deus nag awenet na raktreset ez eo ret alies kregiñ ar buruteller-egzh hervez an urzh kontrol : d), k), b), a). Aes eo neuze o lakaat da brederiañ hep o feukañ ha degas en-dro ar genurzh veizel ha kadoniell en Emsav.

A N E M S A V H A G A R V R O ( 3 )

LIZHEROU

"E Roazhon ar studierion o deus fiñvet peogwir e oa bet skoet war studierion Baris. Ar reuzioù c'hoarvezet e Paris o deus talvezet da sol da A.G. [Kevredad Hollek ar Studierion] Roazhon evit broudañ kounnar ar studierion hag o atizañ. Arouezius oa er c'heñver-se stad ar speredoù en A.G. digwener 10 05 goude merenn. Rektor ar skol-veur en doa darbennet ar goulenn graet outañ diouzh ar beure ha den ne ouie penaos kenderc'hel gant an emsavadeg. Renerion an A.G. a c'hortoze pep tra digant Paris : e Paris eo e c'hoarveze an traoù; eus Paris e rank dont ar peoc'h pe ar brezel. Disadorn da noz (11 05), unan a lavare : "Tout peut-être remis en question d'un instant à l'autre : nous attendons des nouvelles de Paris".

"Dic'hortoz krenn eo bet an darvoudoù evit an holl. Ken dic'hortoz evit al levierzh gall, ar strolladoù kleizat, ar c'hweluniadoù hag evit ar studierion o-unan. Diriaou 09 05 diouzh an noz e lavare ur paotr eus an U.D.B. da rener an A.G. : "Ret eo chom er skol-veur a-hed an noz, betek ma vo darbennet hor goulennoù gant ar rektor. Ur fazi e vefe mont kuit. En ur saviad kreñv emamp bremañ, piv 'oar pet e vimp warc'hoazh ? Hag-eñ e kavimp 200 den evit mont da heul ? Te 'oar ar boan hon eus da lakaat brall e studierion Roazhon. Evit ur wech ma'z int ganeomp eo ret kaout buan ar pezh a c'houlennomp. Keit ha ma tiskouezomp nerzh e c'hellomp kaout ar pezh a fell deomp".

"Pal an A.G. er mare-mañ a hañval bezañ lakaat ar studierion da dabatal war ar c'hudennoù a welont er skol-veur a-benn kinnig ur raktres resis. Evit gwir ken dic'hortoz eo bet an emsavadeg m'en em gav berr renerion an U.N.E.F. [Uniad Broadel Studierion Frañs] (hag alese A.G. Roazhon) koulz hag ar strolladoù politikel a gleiz evit dezrannañ an darvoudoù ha kinnig diskoulmoù. Heverk eo bet er c'heñver-se emzalc'h an Ao.MITTERAND e Parlamant Frañs, d'ar meurzh 14 05, en e respont d'an Ao.POMPIDOU. N'eus deuet gantañ nemet tagadennoù un iriennet a renk izel evit lakaat war gein an Ao.de GAULLE hag ar gouarnamant kiriegezh ar reuzioù. Heverk eo bet ivez komzoù an Ao.POMPIDOU; aet eo diouzhtu e don ar gudenn. Ken arouezius-all eo emzalc'h ar Strollad Komunour Gall a zo savet diriaou a-du gant ar studierion pa ne wele enno, a-rack, nemet ur vandennad vugale vourc'hizion. Ar strolladoù politikel gall a glask tennañ korvo bremañ eus emsavadeg ar studierion evit diskar gouarnerezh an Ao.de GAULLE.



"Evit tud an U.N.E.F. ez eo ar gudenn leuriadiñ ar studierion. N'eo ket ur gudenn nevez evit ar c'hweluniad-se. Er mare-mañ, leuriadiñ ar studierion a dalvez : bezañ barrek da ginnig rak-tresoù ha lavarout petore kemmoù a zo da ober er skol-veur. Ret eo bodañ ar studierion, o lakaat da gendaelañ war o c'hudennoù hag o enframmañ kement ha ma'z eus tu. Kement-se a empleg e chomo, e-pad ur prantad, uhel a-walc'h ar "barr dispac'hel" e-touez ar studierion.

"Ret eo merkañ pegen koumoulek eo e spered renerion an U.N.E.F. ar pezh a zo da ober. Penn an U.N.E.F. a lavare dimeurzh (14 05) er skinwel e oa ret boikotiñ an arnodennoù pe arnodennañ a-stroll gant skoazell ar gelennerion hag ur bern traoù all ken iskis.

"E Roazhon, an darvoudoù zo dreist-holl un heklev eus reuzioù Paris. War an dachenn lec'hel ec'h en em glev rannoù lec'hel ar c'hweluniadoù gall. Netra dibaroc'h eget ar pezh a c'hoarvez e pep lec'h e Frañs, evit ur gwel. Un diforc'h a zo evelkent : d'an 08 05 eo aet ar studierion a-vil-vern war ar straed a-unan gant ar vicherourion hag ar c'hounezerion o huchal : "Labour e Breizh" e-touez meur a dra all. Pouezus eo an devoud-se ha santet eo bet e bouez gant kalz tud, dreist-holl gant ar re a oa a-enep (J.C.R. [Yaouankiz Komuncour Dispac'her (trotskiourion)], sinagarourion, ha darn eus izili an A.G.). Ar re-mañ a veze diaezet bepred gant ar goulennoù war an divoud : ne c'hallent ket nac'h an dra nag e zisteraat ha ne ouient ket penaos e glenkañ en o reizhiad kelennadurel.

"D'an 08 05 o deus kejet, en un doare a zo diaes da zezrannañ, div froud : 1) hini c'hweluniadoù labourerion Vreizh (4 departamant gall all a zeu da heul) 2) hini ar studierion, a oa ur respont d'un darvoud estren. An div froud-se o deus kejet e Brest, Naoned ha Roazhon. N'eo bet lakaet war wel abegoù ar gejadenn gant den.

"N'on ket evit kinnig un dezrann, zoken diglok, eus an devoud-se peogwir e ra diouer ar stlennadoù retañ. Gallout a rafed lavarout emañ en e orin padelezh ar bobl vrezhon, met ne vefe ket gwall sirius. Ar gudenn bleustrek m'en em gav holl Vreizhiz dirazi zo mervel pe mont kuit. Ar gudenn-se eo a dres bevenn ar bobl vrezhon. Kudenn Vreizh eo ha kudenn an holl Vrezhoned. Ur gudenn en digenvez eo evit an darn vrasañ. Kenvezet e vez gant ar strolladoù kleizat gall a lavar ez eo disoc'h gouarnerezh de GAULLE, a ve an hini kiriek nemetañ d'ar pezh a c'hoarvez e Frañs abaoe dek vloaz. Un doare eo da douellañ an dud; marteze ez eo efedus, daoust m'o deus an dud dastumet re a zisfiz ouzh ar strolladoù politikel gall evit krediñ penn-da-benn ur bourd eus ar vent-se. ()

"Goulennet e oa bet digant ar studierion dont da skol-veur ar skiantoù e Beaulieu da ober o annez eno. Er salioù e veze daelet war a bep seurt kudennoù. Dre vras ne oa o taelañ nemet tud enframmet en ur strollad politikel pe tud an A.G.. Arabat e



ve eta fiziout betek re war an daeloù a zo bet d'ar yaou 09 05 evit anavezout ar studier keitat. Ret eo anzav ivez n'eo ket gwall ampart ar gadoriaded war o micher. Er sal ma veze komzet eus ar c'hudennoù skolveurel e oa an darn vrasañ eus an dud. D'ur mare ec'h en em vodas an holl en trepas bras evit klevout rener an A.G. o tanevellañ an emgav edo o paouez kaout gant dean skol-veur ar skiantoù. Daelet e voe neuze. An darn vrasañ eus aterserion rener an A.G. a gomze war un ton katekizel awalc'h, ar pezh na rae ket hemañ. A-benn ar fin e voe divodet an dud ha fiziet e burev an A.G. an emell da zougen dirak ar rektor goulennoù ar studierion.

"D'ar mare-se ne oa ket anat d'an dud e vefe darbennet o goulennoù. Rener an A.G. e-unan ne grede ket goulenn re, gant aon na vefe nac'het. Ersav an U.D.B. a oa taer : ret eo chom er skol-veur betek m'hor bo hor goulennoù. Heñveldra evit ar J.C.R.. Un dra heverk ivez : rouez-tre eo an dud enframmet en ur strollad bennak o deus klasket komz gant ar studier deboner. Hemañ a yae a-du gant an diskoulmoù didaerañ. Pouezet ez eus bet war gengred studierion Roazhon ha Paris.

"Disadorn (11 05) edomp da 14 h dirak skol-veur kozh ar skiantoù. Bodadeg a oa. Danevellet e voe dre ar munud ar pezh a oa c'hoarvezet e Paris an noz a-raok, huchet war an archerion divalav ha divizet aloubiñ skol-veur ar gwir. Eno e voe daelet. Diouzh an noz e oa leun-chouk kelc'hennva bras skol-veur ar gwir. Divizet e voe sevel kengorioù arbennik evit studiañ digreizennadur ar skol-veur, darempredoù ar c'hweluniadoù studierion ha micherourion, kudennoù studierion war ar skiantoù hag al lizhiri, ar bruderezh, dibunadeg al lun 13 05, h.a. ()

"Evel just n'eo ket en ur ober un devezh e vo tu da lakaat ar studierion pe labourerion Vreizh da gompren eo dezho da bleidiñ gant o aferioù ha n'o deus ket da c'hortoz bezañ broudet gant Paris evit henn ober. Diaesat e vo c'hoazh al labour-se peogwir ned eo an darn vrasañ eus ar strolladoù a zo o plediñ bremañ gant ar studierion e Breizh nemet amgerc'helloù eus kreizennoù Paris." (15 05 68)

EMVR-16

"Luskad an 22 Meurzh [krouet war atiz ar studier alaman D. COHN-BENDIT e Skol-Veur Nanterre] evel m'en em ziskouez betek-henn, zo hepken ul luskad-freuzañ. Ar skritell "anarkour" a vez lakaet warnañ ha mennet eo da zegas an dael war gement tra diazezet a zo.

"Pe ziazezoù trabedel, pe bal bedel zo dezhañ, ha dre vras d'ar strolloù bihan oberiant a zo gwir luskerion an turmud e-touez ar studierion ? Emaon o paouez divizout gant ur c'hallez a oa o tont eus Paris. Entanet oa ar vourc'hizez-se gant an aergelc'h a ren er Sorbonne : "Ar studierion a dremen o amzer o prezeg hag o taelañ. Micherourion yaouank a zeu d'o zro a-dreñv ar mikro. Pur, onest int holl. N'eo ket evel an hailhoned kozh a

gozh politikerion, h.a."

"Anat eo ez enaou al luskad-se er Frañsizion maget gant o stuzegezh republikan un hiraezh lemm da oadvezh ar Grands Ancêtres. Ar froudad werinelour a strink eus kondon an ene gall. Betek-henn avat, e nac'h Luskad an 22 Meurzh kemer perzh en aozadur ebet; e nac'h en em fetisaat en aozadur ebet; e nac'h kemer amkan nes ebet. Anzav a ra un amkan pell, a zo hini an Emsav kevarzhelour abaoe ur c'hantved : ur gevredigezh ma ne vo mui korvoet an den gant an den. Evit bremañ e fell dezhañ bezañ trelusker hepken, da lavarout eo kas e lusk en tu all dezhañ, a-benn diskogellañ ar gevredigezh o ren. Hag aze emañ gwan bras tud al luskad-se : fellout a ra dezho devoudañ ar freuzidigezh, met n'eo ket he reoliñ; ha ne hañvalont ket bezañ chalet muioc'h gant sevel ur gevredigezh all. Arouezius eo o respontoù er c'heñver-mañ diwezhañ : diskouez a reont bezañ mezvet gant terzhienn ar freuzañ, ken ma sellont evel amzere pe vourc'hizek atersoù ar gazetennion a-zivout ar gevredigezh a fell dezho kaout e gwirionez. "Dre ar c'herzhed e prouer al loc'hañ" emezo, pezh a zo da gompren : "Ur gevredigezh a vo bepred forzh penaos. Ha peogwir hor bo distrujet an hini gozh, ne c'hall nemet bezañ mat an hini a savo da heul". Fiziout a reont war natur vat mab-den. Diskibion ROUSSEAU int muioc'h c'hoazh eget diskibion MARX. Kehelañ a reont an emdarzhegezh a gasas o Grands Ancêtres d'an Terreur ha d'an Impalaeriezh.

"Ar studierion o deus sachet war ur varrikenn ha setu ar bern a-bezh o tiruilhal bremañ" a lavar A. Petore barrikenn lec'hiet mat er bern o deus ar studierion dilec'hiet ?

"Unan eus dodennoù Luskad an 22 Meurzh eo e enebiezh ouzh ar gevredigezh c'hreantel, eleze ar gevredigezh-veveziñ. Troet eo an enebiezh-se kenkoulz-all ouzh ar c'hevredigezhioù anvet sokialour hag a gemer da amkan diraez ar riezoù kevalaour ar muiañ araokaet. Ur baleg/feuls a ziskouez paotred al luskad ouzh ar stuzegezh kreizennet war ar paoter beveziñ. Hag aze emañ moarvat ar pep nevesañ hag ar pep krousañ en o emzalc'h.

"Goulenn a reer avat hag-eñ ez eo an enepbevezelouriezh-se he deus roet d'ar studierion o nerzh-deluskañ war ar vicherourion ? Nann, sur mat. E pep Gall, e pep micherour gall ez eus un Amerikan o kousket; se ne zirenk ket ar P.C.F., peogwir ez eo an amkan-se hini ar gevredigezh soviedel ivez : diraez barr-bevañ ar riezoù kevalaour araokaetañ. Ret eo lavarout ivez en ur dremen e karfe ar C'hallaoued kaout barr-bevañ an Amerikaned hep kaout da giañ ouzh al labour evel an Amerikaned.

"Koulskoude ez eus un devoud splann : trelusket eo bet stourmad ar vicherourion diwar emsavadeg ar studierion. Moarvat e tle an alc'houez eus kement-se bezañ kavet dre un dezrannadur eus ar saviad gall a-vremañ.

"Diaesterioù kevredigezhel a zo e Frañs. Dav eo lavarout ned a ket fall an traoù er par meurgantel, da lavarout eo mar kemerer ar riez a-vloc'h. Stabilaet eo bet ar moneiz abaoe dek vloaz.



Adlusket eo bet an armerzh bennozh da steuñvoù poellek, - komz a ran bepred eus armerzh Frañs kemeret a-vloc'h, - ar pezh a zo un dro-nerzh mar lakaer e kont an diouer a entan broadel a ren er boblañs. Dre ur politikerezh diavaez ampart ez eo deuet de GAULLE a-benn da reiñ d'e vro ur savlec'h etrevroadel mat. Ret eo anzav e voe gounezet ar gwelladurioù-se diwar-goust gwiskadoù 'zo eus poblañs al labourerion, - evit chom kevezus en nevid-bed e rank ar greanterezh gall asantiñ da aberzhioù ponn-er, krennañ war e brizioù ha, da heul, war ar goproù. Dilañset e chom daoust da se Frañs e-keñver riezoù all ar C'henvarc'had, evel ma'z eo dilañset ar C'henvarc'had a-bezh e-keñver ar Stadoù Unanet. Emañ endeo an enkil o reuziañ amañ hag ahont e gennadoù diseurt an armerzh gall : ar gouerion a ziskouez o nec'h dirak prantad ar frankkevezañ en amgant ar C'henvarc'had a zo o vont da zigeriñ e gouere; enkil ivez er greanterezh, p'emañ da skouer an tangirri estren oc'h aloubiñ didruez an nevid gall. Peadra zo da vezañ nec'het. Hag-eñ avat ez eus peadra da zisplegañ an ec'hwel hollek o kregiñ en un doare emdarzhel-rik er greanterezh hag en amaezhiadurioù ? N'eus ket, a gredan.

"Krediñ a ran n'eo ket kevredigezhel ez eo an droug da gentañ, met keodedel. Ar c'hloaz vrasañ a c'houzañv al lodenn emskiantek eus ar boblañs c'hall eo bezañ dalc'het er-maez a-grenn eus al levierezh. Ar gouarnerezh gall a-vremañ ne zalc'h kont ebet eus mennadurezh ar bobl, hogen fellout a ra dezhañ leviañ ar vro diouzh ul linenn bolitikel divizet gant un dornadig a stadourion, - kaeet a-dreñv ur vogeriad kalvezveliourion. Dismeg en deus de GAULLE ouzh an dud, un dra anavezet mat eo ha diaes da c'houzañv gant an dud o deus gwad dindan o ivinoù. Neuziet eo bet ar vuhez politikel gall a-bezh war an emzalc'h-se a zismeg. Aze emañ, a gredan, brasañ andon ar feulster a zo o reuziañ dre ar vro er mare-mañ.

"Un devoud heverk eo ne hañval tud Vreizh dre vras kompren grik er pezh a c'hoarvez, hag abaf e chomont. Emzalc'h tud en anistor dirak gloazoù an Istor. Penaos e savfent a-daol trumm da c'houlenn digant de GAULLE resteurel ar galloud d'ar bobl, pa verk dezhi ar gerioù "galloud" ha "pobl" kealioù difetis hepmuiken.

"De GAULLE n'en deus ket fiziañs er boblañs c'hall eus e amzer evit difenn ha kadarnaat ar "vezañs c'hall" er bed. Ar brasañ dispriz en deus eñ ivez ouzh ar gevredigezh-veveziñ; met e emzalc'h ned eo ket heñvel ouzh hini paotred an 22 Meurzh. Int o deus kasoni ouzh ar pec'hed, ha fellout a ra dezho dieubiñ an dud diouzh lorgnez ar vevezelouriezh; eñ en deus dispriz ouzh ar bec'herion, hag o fellaat a ra diouzh ar galloud.

"Kudenn ar "vezañs c'hall" a vefe da sklaeriañ ivez. Ar gudenn-se a c'haller dezrevell evel-henn : hag-eñ e c'hell al levier-  
ezh politikel derc'hel ur sevenadur en e roud pa n'eo ket ar sevenadur-se ken evit trec'hiñ diouzh e nerzh e-unan. Keñveriañ



a reer a-wechoù de GAULLE ouzh LOUIS 14; diforc'hioù zo evel-kent. E grez ar Roi-Soleil e rene ar galleg war lezioù roueel Europa. E grez ar Grand Charles e ranker sevel Maisons de la Culture war diriegezh Frañs hec'h-unan. Strivoù de GAULLE, evit fromus ma'z int, a chom danzeel a-walc'h. Ar sevenadur gall zo kouezhet en e stad a wander, da lavarout eo ez eus anezhañ ur sevenadur-bet-sevenet. Ur sevenadur en e stad a greñvder, eleze ur sevenadur-o-seveniñ, n'en deus ket ezhomm eus kemend-all a strivoù en-dro dezhañ evit bleuniañ. Ar Frañsizion n'int ket mennet da dalañ ar priz uhel goulennet diganto evit derc'hel gant un neuz a greñvder ur sevenadur kouezhet en e stad a wander." (18 05 68)

EMVR-17

"Poent e ve ren an dezrannadur a roio un diazez boutin d'ar sokialouriezh, d'an emsaveriezh kevarezhel mar karit, ha d'an emsaveriezh broadel. Anat eo ne glot mat hini ebet eus an diskoulmoù kinniget betek-henn : ar sokialourion c'hall hag alaman o deus treitouret ar sokialouriezh e 1914 en anv o broadelouriezh; ar Soviedoù a ra ur politikerezh broadelour, hogen hep henn anzav, ha dreist-holl hep reiñ ur gelennadurezh fraezh o savlec'hiañ o broadelouriezh e-keñver o sokialouriezh; Sinaiz a embann bezañ komunourion ha brogarourion, hogen ne roont ivez lec'h ebet d'ar vrogarouriezh-se en o freder politikel, ha da grediñ ez eus ez arveront ar vrogarouriezh hepken evel un nerzh chomet e dilerc'h an tremened, mat da arverañ peogwir ez eus anezhañ, met ne roont dazont ebet dezhañ. Un diskoulm all evel just a ve da venegiñ, hini HITLER pa embanne dres e gelennadurezh broadel-sokialour (pe genelwerinelour) : an anv e-unan a verk a-walc'h edo prederiet gant ar gudenn ivez, hogen anat eo, faos e oa e vroadelouriezh pa gemere diazez, n'eo ket war ar rezid, ar spered, ar vuhez evel tachenn-grouiñ mab-den en e rezid, met war an nerzh loenel, mojenn ar ouenn, ar beved evel tachenn-sujañ e piaou d'ar re greñv; heñveldra, ha dre an hevellep arbennoù, e oa faos e sokialouriezh, rak lemel a rae pep galloud digant ar bobl evit e fiziout en ul Leviour, en em lakaet da zileuriad mojennel ar bobl. Ret eo lavarout eo kouezhet er pleg-se ivez an darn vuiañ eus al levieriezhoù "sokialour" pe all a weler en-dro deomp : STALIN, MAO, de GAULLE zo bet chalet muioc'h gant berzh bedel o riez eget gant lakaat o c'henvroiz da gemer perzh gwirion er galloud a oa en em gavet etre o daouarn. Me 'oar, ur bern arbennoù mat ez eus bepred evit kreizennañ ar galloud etre un nebeut daouarnoù, ha pa ve da gentañ an efedusted. Met un temptadur grevus eo bepred lakaat an efedusted da dremen a-raok ar speredelezh : derou an holl impalaeriezhoù eo. Rak, lakaet er-maez HITLER a gemere ar Führerprinzip da ziazez prederouriel a priori, ned eo impalaerouriezh STALIN, MAO ha de GAULLE nemet sokialouriezh ha demokratiezh o deus klasket bezañ efedus en tu all d'ar bevennoù

merket gant reizh ar spered.

"Evel just e c'haller degas skouerioù all : broioù Lec'hleñn, Israel, o tiskouez diskoulmoù a hañval bezañ reishoc'h. Hañval-out a ra tud ar broioù-se unaniñ hep re a ziaester o broadelouriezh gant o sokialouriezh. An diskoulmoù-se avat zo diskoulmoù dre ar pleustr, ha n'eo ket bet lakaet o diazezoù speredel e stumm ur gelennadurezh evit an denelezh a-bezh. Ha dre-se, dre an arbenn ma chom dezho teñval ha diemouez diazezoù o c'hempouez speredel, e chomont en arvar bepred da gouezhañ e temptadur an impalaerouriezh (sellomp da skouer emzalc'h Israeliz e-keñver an Arabed).

"Krediñ a ran ez eo mallus degas sklerijenn war ar c'horn-se eus hor c'hudennoù, a zo ivez ur c'horn teñval e kudennoù an holl vroioù. Penaos meizañ fraezh broadelezh ha sokialouriezh (pe, resisoc'h, kevarzhelezh) e seurt doare da reiñ un diazez reizh d'an div, hep na zeufe ar vroadelezh da vezañ ur benveg-efediñ etre daouarn ar sokialourion hag ar sokialouriezh un emzalc'h kadoniel hepken a-berzh ar vroadelourion?" (26 05 68)

EMVR-18

"Gant dudi em eus lennet an danevell EMVR-12 war Emsav 17/141. Reizh eo stignet ar gudenn gant ar c'hlozadur : ha dont a reer d'an Emsav dre ar brezhoneg, pe d'ar brezhoneg dre an Emsav ?

"Reizh eo merkañ ez eo ar bruderezh evit ar yezh un hent skort evit brudañ an Emsav. Ar yezh ned eo talvoudek nemet evit ar re a zo e-barzh an Emsav endeo. Evit ar re a zo er-maez n'he deus koulz lavaret dedenn ebet. Keflusker ur c'harr-tan ne dalvez nemet frammet el lec'h azas; distag diouzh ar c'harr-tan e tenn hepken evezh un nebeut arbennigourion. Ar yezh ned eo ket un unvez distag nag er vuhez kevredigezhel, nag en ober politikel; ur fazi eo bepred he distroc'hañ hag he c'hinnig distag d'an dud. Nag a wech e klever tud ar vro o lavarout diwar-benn un emsaver : "C'est un celtisant", "un arbennigour war ar brezhoneg". N'eus ket splannoc'h azon a c'hwitadenn : an emsaver e kaoz zo emsaver hepken e diabarzh an Emsav, met evit an diavaez n'eo nemet paotr ar brezhoneg, da lavar ut eo ur meni gouizieg war un danvez didalvoud a-walc'h, un hendraour, pa n'eo ket un oristal. Ha diremed e teu ar c'hwitadenn da vezañ pa'z a an emsaver betek klotañ gant e skeudenn diavaez ha bezañ "paotr ar brezhoneg" zoken e diabarzh an Emsav e-unan.

"Ar pezh a zle an Emsav kinnig d'an dud n'eo ket parzhioù troc'h-et dioutañ, - taolet evel higennoù da bakañ an dud. Met eñ e-unan, klok ha fraezh, en deus d'en em ginnig evel diskoulm da gudennoù ar vro, hag evel nerzh barrek da erounit an diskoulm-se." (30 05 68)

EMVR-19



LENNADENNOU

Guy HERAUD, L'Europe des Ethnies, Paris 1963.

Niverus eo ar studiadennoù gouestlet d'ar broioù suj ha ken niverus-all an diskoulmoù kinniget. Daou abeg hon eus bet evit dibab levr G.HERAUD : peogwir e tegas ar gudenn en ur par hollek, ha peogwir en deus al levr levezon war gelc'hioù politikel 'zo e Breizh.

Mennad an oberenn eo termenañ gwirioù ar broadoù suj ha bras-tresañ un urzh etrevroadel diazezet war an doujañs dezho, - ar gevreadelezh. D'an atersoù-mañ lerc'h-ouzh-lerc'h e respont an aozer : Petra eo ur genel ? Petore lec'h zo d'ar c'henelioù er reizhiad politikel a-vremañ ? Pere eo ar c'henelioù en Europa ? Penaos diazezañ un Europa nevez war ar c'henelioù ?

Evel a weler, ne loc'h ket G.HERAUD diwar ar vroad, met diwar ar genel (l'ethnie). Lakaat a ra pemont pajenn da spisaat ar c'heal-se. Ar genel, emezañ, zo "ur stroll tud azonet-diforc'h dre berzh e yezh, e stuzegezh pe e sevenadurezh" (p.23). Buan e tizoloer perak eo bet dibabet ar genel da sellad-diazez : mennet eo an aozer da zifenn ur meizadur divoas a-walc'h, da dud hor remziad da nebeutañ. Penaos e komprenomp-ni hor bro ? Dre hec'h istor da gentañ penn; adalek diazezidigezh Breizh pemzek kantved 'zo ez eo meizet unvez hor pobl dre ur poell istorel. G.HERAUD, evitañ, n'en deus nemet disfiz ouzh ar poelloù a seurt-se : "En ur selladur skouerel, e tlefe an azon istor-el bezañ argaset, pe da nebeutañ kemeret en e geñverelezh. Rak an istor en deus muturniet ar c'henelioù, dicafrantet domanioù yezhel, rediet da unanadurioù ha da zisrannadurioù enep natur" (p.35-6). Evit mad ar c'henelioù, a gav dezhañ, e tleer difenn gwirioù an natur a-enep gwirioù an istor.

Souezh ebet enta da gaout mar en gwelomp oc'h argas sell an istorour hag o kemer sell an naturour; hag o pleustriñ da savelañ "natur" end-eeun ar genel gant aked un naturour o tiforc'hañ gouennadoù al laboused. "Ur stroll naturel eo ar vroad", emezañ p.66. Souezh ebet c'hoazh mar meneg da gentañ ar ouenn e-touez azonou-diforc'h ar genel : displegadurioù jedoniezhel war ar rummoù gwad hag al liamm o deus gant an temzoù-spered (gwad A, temz krouus; gwad O, temz kevredus; h.a.), a ro dezhañ an tu da ziazezañ keal ar patrom-kenel (ethnotype), da lavarout eo an neuz-den skouerel eus pep kenel. Merkomp, en ur vont, ned eo ket nevez ar seurt arguzennoù; gwelet int bet c'hoazh oc'h en em zisplegañ en Europa, adalek BOULAINVILLIERS, GOBINEAU betek HITLER; lavaromp ivez diouzhtu evit didamall G. HERAUD, n'eus netra boutin etre e vennadoù peoc'helour ha mac'h-omerezh gouennelour an nazied (1). Azonou-diforc'h all eus ar

*Arctus  
Dun...*



genel eo ar gravez, an istor, ar glenn, an armerzh, ar yezh; ne weler ket re penaos kavout ur poell etre kemend-all a elfennoù diseurt, met ar rebech-mañ ne dalvez ket, en abeg d'ar savboent kemeret : kentañ emell an naturour eo deskrivañ ar pezh a wel, ha goude-se displegañ mar gell. Ha splann eo ar pezh a wel : evit ar gravez, e teu meneg eus katoligiezh Iwerzhoniz o diforc'has a bell 'zo diouzh Breizhveuriz protestant. N'eo ket ar skouerioù a vank kennebeut a zarvoudoù istorel o tont da greskiñ ar c'hemm etre div genel, - met un arm daoudroc'h eo an Istor, ha gwell eo d'an aozer lemel e dalvoudegezh digantañ evit a sell e vennad. Gant ar yezh evel just eo brav ar c'hoari; da bep labous e gan, da bep kenel e yezh, - evel-se ez eo diferet gant hor mamm-veur an Natur : "Pouezusañ elfenn ergorel ar genel eo ar yezh" a lenner p.44. Pouezañ a ra G. HERAUD war al liammoù don a zo etre ar yezh hag ar patrom-kenel, al lennegezh, an arzoù, oc'h ober dave pergen da gelennadurezh Leo WEISGERBER. Menegiñ a ra penaos e c'hell ur yezh a sevenadur diskenn e renk an trefodoù, - ha penaos e c'hell ivez un trefod adkrapat gant hent ar sevenadur evit reiñ ur yezh uhel en-dro. E nep lec'h avat ne ziskouez ar wikefre bolitikel a zo en hevelep dedroadurioù. Pe, mar komz eus politikerezh, ez eo bepred evit diskouez ar gweredoù fall en deus bet ar c'hoari politikel war donkad ar c'henelioù. Ar c'henelioù o vezañ gwirvoudoù diazezet war an Natur, ar pep gwellañ a c'hell mab-den ober evito ez eo o gwareziñ evel ma warezer ar gweledvaou.

N'eo ket dreistezhomm merkañ penaos e veziz G.HERAUD geneliezh ar genel. Ne lak ket devouderezh ebet etre an elfennoù azonus a zeskriv. Ne lavar ket ez ampleg da skouer ar yezh-mañ-yezh ar rumm-mañ-rumm gwad, pe e tevoud dre ret an temz-mañ-temz ar gravez-mañ-kravez evel ma embanne gwechall an deutoniourion (2). Ur meni lotiri e ve neuze diwanidigezh ar c'henelioù ? frouezh an dargouezh rik ? Pell diouzh kredenn don G.HERAUD emañ seurt meno. N'eo ket evit netra ez eus enlakaet e penn derou al levr ur gemennadenn a-berzh Mikhael AIVANHOV, Mestr war ar Skiant Ezoterek. Pep kenel zo frouezh Ragevezh an Natur, - a zo ivez hini Doue. He levenez a gemerfe an Natur oc'h aozañ ar c'henelioù war c'horre an Douar evel ur vamm o vleuniañ he zi. Amañ torkad an Iwerzhonegerion, katolik, gwadet A da 60 %, aze torkad ar Verbered, muslimat, gwadet A da 40 %, h.a.. Un naturelouriezh kevrinel eo enta hini an aozer, pell-mat diouzh an naturelouriezh arnodel a anavezomp.

Ober gaou ouzh G.HERAUD e ve koulskoude e ziskouez evel bac'het en e reizhiad naturelour. Livañ a ra ar genel evel un natur, evel un natur avat a c'hell bepred mab-den sammañ pe zisteurel. Koun en deus an naturour ez eo mab-den ur boud emouiziek; gouest enta da emouezañ ouzh e genel, ha dre-se da gaout un emskiant a genel. Diwar-se e teu da ziforc'hañ daou ster d'ar ger kenel : ar genel er ster ergorel, da lavarout eo ar genel-natur deskrivadus en hec'h azonoù-diforc'h, hag ar

genel er ster dangorel, da lavarout eo hervez an emskiant he deus anezhi hec'h-unan, - seurt kenel er ster dangorel o vezañ ar vroad.

Ur wech kinniget an traoù er mod-se e teu fraezh ar pezh a zo d'ober. Da gentañ, broudañ an emskiant-kenel e pep lec'h en Europa, rak "evit galloudus ma'z eo dibarelezh ergorel ar genel, n'eo ket a-walc'h evit bezañ ur vroad; ar genel a rank c'hoazh kaout emskiant ha karantez ouzh he fersonelezh, ar youl d'he gwareziñ ha d'he stuziañ" (p.57). D'an eil e ve aozet, diwar ar c'henelioù emskiantek-se, ur c'hevread europat, gant ur gouarnamant-kreiz a ve muioc'h ur mererezh eget ul levrierezh, - pouezañ a ra ar skrivagner war emrended ar c'henelioù kevreet.

Ne lavar ket avat petore nerzh a gaso da get ar Stadoù a zo bremañ o ren, nag ivez petore nerzh all a zegaso ar pobloù da zilezel kement preder all evit en em reiñ d'an uhelvennad a ginniger dezho : miridigezh ha stuzidigezh o c'henelioù. "Ar pep gwellañ e ve dibolitikaat dilennoù an dud a-fet kenel, hag ober ma ve graet an dilennoù-se hervez an azon gouiziel. D'ar genelvredoniezh (ethnopsychologie) eo da gomz. N'eus nemet studi azonou-diforc'h ar c'henelioù a zo gouest da reiñ menegadurioù talvoudus" (p.66-7). "Notomp ne vez ket embreget ur youl evit netra, met e sell eus ur pal resis. () Petore finvez anzavadus merkañ d'ar broadoù, ma n'eo ket diorren o stuziadur (3) ? En oadvezh ar C'hevread ma vez kumuniezh hollvedel ar pobloù o vastañ da ezhommoù surentez hag aezonei an denelezh, n'eus mui gant diseurtelezh ar broadoù sol na pal ebet ken er-maez eus diseurtelezh ar yezhoù, al lennegezhioù hag an arzoù" (p.67). Ne c'hellomp ket mirout a soñjal e gwengel an Oad Aour, evel ma teue ivez gant ar varksourion gentañ : "Dreistezhomm ez a emell ar galloud-Stad en darempredoù kevredigezhel (). Gouarnerezh an dud a lez al lec'h gant mererezh an traoù (). Ar Stad ned eo ket freuzet, steuziañ a ra" (4).

Diaes e ve ijinañ dibolitikelañ meizadur eus ar bed. Mar'd eus e levr G.HERAUD un nebeut pennadoù a dalvez ar boan da vezañ lennet, ar re a zeskriv gwaskerezh ar broioù suj en Europa pergen, hon eus gant ar peb all ur gwir havez an arzh. War zigarez skoazellañ ar pobloù suj en o dieubidigezh, e vounter anezho pelloc'h c'hoazh en o dibolitikelezh hag en o anistor. Ha muzul an anistor brezhon eo ar strolladoù politikel eus Breizh a gemer levrioù seurt hemañ da ziazez d'o "folitikezh sevenadurel".

Ur gudenn zo lakaet e kont gant tezennoù G.HERAUD, ur gudenn a wironiezh. Ne ra ket anv anezhi, met ober a ra evel pa vije diskoulmet ha dreist rendael an diskoulm kemeret. Ar gudenn-se zo houmañ : petore gwirioù he deus an natur war an dud ? Hag-eñ he deus gwirioù e kement ha ma'z eo natur, pe e kement ha ma'z eo lec'h-krouiñ evit mab-den ? Pouezus eo henn gouzout, rak al



labour-krouiñ a zistruj an natur. En degouezh kentañ e tleer damantiñ da ziwall an natur, ha mirout ouzh an embregerezhioù he distrujfe. En eil degouezh ez eo an natur un danvez kevala da vab-dén en e labour-krouiñ. Ar respont empleget gant kelennadenn G.HERAUD eo an hini kentañ, anat eo : ar genel zo un devoud-natur, an natur-se he deus gwirioù war an dud; dlead an dud eo he mirout en he stad. E-se, ar Stad C'hall a ra un torfed o pleuskañ ar genel vrezhon d'ober anezhi un danvez kevala en he sevenadur. Hogen an Emsav stadel brezhon a ra an hevelep torfed pa venn distrujañ "natur" ar gevredigezh vreizhat a-vremañ evit krouiñ ur gevredigezh nevez. Dedalvezet da Vreizh, e teu splañ naturvirouriezh G.HERAUD hag an enebadur don a zo etrezi ha dispac'helouriezh an Emsav.

E gerioù all, hag-eñ ez eo ur bobl un teskad tud bodet dre berzh un niver a zibarderioù boutin, dezho da emell pennañ diwall an dibarderioù-se? pe hag-eñ n'eo ket kentoc'h ur gevredigezh a rank, a-raok pep tra, krouiñ diazezoù he buhez ha binvioù he fadout, da lavarout eo hec'h ensavadurioù, - ar yezh o vezañ unan eus ar re gentañ anezho? Hag-eñ n'eo ket an ensavadurioù-se kevala kentañ ar bobl ha lec'h-embreg he gwirioù? Rak, hag amañ e pouezomp, n'eo ket ar genel, devoud naturel pe get, a zo kentañ, met ar bobl, devoud politikel. Rak ensavadurioù ur bobl a anver c'hoazh he stadegezh, ha dre he stadegezh end-eeun ez embreg ar bobl he galloud, - n'eus termenadur all ebet d'ar galloud politikel.

Dre-se, ar pal n'eo ket goulenn gwirioù d'ur genel vrezhon, met krouiñ ar Stad Vrezhon, lec'h ar galloud brezhon.

Kentañ krouadenn ur bobl zo he stadegezh, da lavarout eo hec'h ensavadurioù; int eo a zo hec'h ergorelezh, n'eo ket dre berzh ur "particularisme" bennak, met peogwir ez int organoù politikel he buhez. E stern hec'h ensavadurioù e kendalc'h ar bobl da grouiñ; ha frouezh he c'hrouiñ eo he sevenadur. E-se ned eo ar stadegezh nemet skoulm kentañ ar sevenadur; e-se n'eus, ha n'eus da vezañ, troc'h ebet etre stadegezh ha sevenadur. Pa c'hoarvez ur seurt troc'h, pa c'hoarvez da nerzhoù-krouiñ ur bobl bezañ troc'h diouzh he galloud politikel, ez eo kondaonet ar bobl-se d'an arallekadur ha d'ar steuzidigezh.

Petore devoudoù a zo neuze dindan ar "genel" evel termenet gant G.HERAUD? Dre ren he buhez istorek e wisk pep pobl neuzioù dibarek a yezh, a stuzegezh, a gravez, h.a.. Met n'eus diazez ebet da gavout en neuzioù diavaez-se, - un disoc'h tremeniat n'int ken. Ar bobl o dilezo evit reoù all pa gavo he mad ouzh henn ober. Aze emañ fazi ar folklorourion ha, dre vras, mirourion ar stuzegezhioù; naturvirouriezh G.HERAUD a anavezomp mat e Breizh e stumm ur stuzvirouriezh; bez' ez eus un emzalc'h folklorek troet war-du ar brezhoneg, ar relijion, ar gedvuhez, ar politikerezh, evel ma'z eus unan troet war-du ar c'hoefoù.

Komz a reomp eus "diazez" hag eus "diavaez". Penaos termenañ

marbrou  
C'hall.



an "diazeez"-se, hag an "diabarzh" neuze ? E meur a lec'h (5) c'hoazh hon eus pouezet war an diforc'h krenn a zo etre stuzioù tremeniat ur vroad, - un Emsav, - hag an endoniad bev a zo e devoud o c'hendalc'helezh. Pep pobl, - ha rak-se pep emsav sevel-pobl, - o ren he zonkad, oc'h en em seveniñ, a grou un diazezez stabil a furmoù amzeriek, na c'hallfent ket bezañ distrujet hep na ve distrujet ar bobl war un dro. Diazezez ar stadeg-ezh eo ar c'hevala istorek-se. Met ar sell istorour hepken zo evit meizañ kement-se, ha n'eo ket ar sell naturour. Ar sell naturour ne c'hell gwelout ar Stad nemet evel ur redi diavaez, un nerzh nac'hel o herzel ouzh an natur a vleuniañ. Aes eo d'an naturelourion, d'an anarkourion a zo ur rummad anezho, degas skouer an impalaeriezhoù. Aesoc'h c'hoazh eo respont : hag-eñ e weler ur bobl oc'h embreger he galloud en impalaeriezhoù ? Anat eo ne gomzer ket eus an hevelep tra.

Pa zegouezh al lenner gant rann al levr a bled gant kenelioù Europa, ne chom ket hep souezhañ. Rak ar c'henelioù meneget zo dres ar re droc'het diouzh o stadegezh orin. Ar re burañ dre-se moarvat, e selloù G.HERAUD. Perak neuze bezañ chomet mut, en ul levr gouestlet da salviñ ar c'henelioù en argoll, war ar c'henelioù gall, saoz, alaman, - ar re zibur, gwallvesket ma'z int gant ur Stad emveliek, ha dre-se kalz muioc'h en arvar, mar kreder tezennoù al levr, eget ar c'henelioù manet paour met dinamm ? E gwir, ar c'henelioù pur ha paour-mañ zo hepken kevredigezhioù muturniet eus o ensavadurioù, eus framm o stad-egezh, eus embregerezh o galloud politikel; dilerc'hioù broadoù tonket da steuziñ dre berzh o muturniadur muioc'h eget dre berzh nep gwaskerezh, heñvel ouzh lostoù glazarded o vont diflach hep na ve ezhomm d'o moustrañ gant an troad. Anat eo n'eo ket gant seurt elfennoù mac'hagn, kollet ganto ar pep muiañ eus o c'hrousted hag o sevenusted, e vo savet un Europa nevez. Aon hon eus ez eo c'hoazh gant ar riezoù o ren hag o holl bec'hedoù e vo kavet azonoù ar yec'hed a glasker d'ar broioù suj; da nebeutañ, mar'd eus gant darn anezho kleñvedoù all o lazho a-benn ar fin, ez int evelkent skouerioù a bobloù en o stadegezh hag en o sevenadur, bev ha krouus. Darvoudoù Mae 1968 o deus diskouezet dimp pegen buhezek e chom an nerzhoù istorek e-touez ar C'hallaoued, ha pegen izil e van ar bobl vrezhon e-pad keid-all : ne ouezas sevel eus he c'homa istorek nemet evit kouezhañ en un drevezerezh truek eus ar pezh a dremene e Paris.

Kent klozañ e fell dimp degas hor gwerenn-greskiñ war ur poent eus tezennoù G.HERAUD a sell a-dost ouzh kudennoù Breizh. War ar poent-se end-eeun en deus bet al levr e vrasañ levezon en hor bro, hag ul levezon fall, ret eo lavarout. Hervez term-enadur G.HERAUD, yezh kenel Vreizh, pe "Vreizh-Izel" da nebeutañ, zo teodyezhoù henvoazel maezioù ar C'hornog, anvet pompadus

"yezh ar bobl" gant al ledemsavioù. Pelec'h emañ neuze, a-fet yezh, ar "genel er ster dangorel", frouezh an emskiant vroadel? Rak ar re a gomz "yezh ar genel" ne sellont ket outi evel o yezh vroadel, ha pa sav enno an emskiant vroadel en he dilezont evit komz an danvez yezh-Stad ez eo brezhoneg an Emsav. Amañ hon eus da bouezañ kreñv, rak n'eo ket dibaot an dud a gred c'hoazh ober mat oc'h en em douellañ ha sellout an teodyezhoù henvoazel evel yezh vroadel Breizh. An diforc'h n'eo ket yezh- oniel, - rak goude holl n'eus ket un islonk etre yezh an Emsav hag an teodyezhoù henvoazel, - met tonkadek. An deodyezherion henvoazel ne vennont tonkad ebet d'o brezhoneg, - ganto emañ ar brezhoneg e stumm un danvez blin o koazhañ, dres en doare ma koazh danvezennoù an natur, peogwir n'eus mui youl politikel ebet evit e stigmañ etrezek un dazont. Yezh an emsaverion er c'hontrol zo anezhi un danvez oberiek meret e sell eus an dazont, ha n'eo ket hepken un dazont yezhel, met un dazont istorel klok, kevredadel ha politikel. Kement-mañ a zleer displegañ d'ar re yaouank digalonekaet en o foan da zeskiñ komz evel ar gouerion teodyezhoù a laka ar gouerion o foan da zizeskiñ.

Un touell eo krediñ, evel ma ra diskibion vreizhat G.HERAUD, e vo a-walc'h plantañ Breizh evel m'emañ en ur c'hevread a genelioù evit lakaat "yezh ar bobl" da vleuniañ. A-walc'h e ve neuze lakaat ar brezhoneg er skolioù evit reiñ lañs d'ar brezhoneg war ar maez, - kenkoulz e ve reiñ botoù d'un den hep divesker. Ezhomm ebet da brederiañ evit gouzout e kendalc'hfe ar Vrezhoneg d'en em zizober diouzh an teodyezhoù henvoazel. Kentoc'h eget un danvez blin ha didalvez er vuhez kevredigezhel, e talc'hfent da zibab an danvez oberiek nemetañ a anavezfent c'hoazh, da lavarout eo ar galleg. Plijet pe ziblijet da zifennourion "yezh ar genel", ez eo ar galleg an danvez oberiek e Breizh, dre an arbenn ma'z eo lodek er stadegezh o ren, ma'z eo un ensavadur-Stad, ha ma kemer dre-se war-eeun talvoudegezh leun er vuhez kevredigezhel. Ar brezhoneg ne vo e-tro da argas an alouber-se nemet dre vezañ lodek er stadegezh vrezhon, dre vezañ un ensavadur eus ar Stad Vrezhon. Da c'hortoz, p'o deus hor c'henvroiz da zibab etre un danvez oberiek estren hag un danvez blin dezho, ez eo an danvez oberiek estren a zibabont hep termal. Ne ve abeg ebet dezho da gemmañ o dibab ur wech ma ve savet kevreadur ar c'henelioù huñvreet gant ar rannvroelourion europat a c'hiz nevez a ren fourgas e Breizh hiziv.

Hag e ve ar gwir leun ganto, rak ar genel "naturel" (stuzeg-ezhel evit hec'h envel reizh) n'he deus gwir ebet drezi hec'h-unan war an dud, hag an dud a chom dieub bepred d'he degemerout pe d'he disteurel mar kavont o mad ouzh henn ober. Gouzout a ouzomp ivez ez eus un trede hent etre degemer ha disteurel : hent ar c'hrouiñ. Dre an ober-krouiñ e vez distrujet an danvez blin "naturel"-se, hag en e lec'h e tiwan un danvez oberiek, lodek e tonkad ar bobl. Hent an Emsav eo. E-se en deus an Emsav

*si'co laka  
a fell zezha*

*de Jostan*

*adun  
de Jostan  
a fell zezha  
si'co laka  
a fell zezha  
de Jostan*



perc'hennet, en e wir leun, danvez an teodyezhoù ha goveliet diwarnañ he yezh-Stad d'ar vro.

*hag en  
evluer*

Kement a lavaromp a-zivout ar yezh a c'hell bezañ lavaret a-zivout pep doare all eus buhez ar vro. Istor Breizh suj zo hini ur rannbarzh gall war dregemmañ : koazhañ a rank ar boblañs ober, hag emdreññ gennadoù an armerzh e sell da gaout kempouez gant ar peurrest eus Frañs. En enep, Istor Breizh evel danvez bro dieub zo hini ur vro isdiorreet, mestroniet gant ur vro sujer, ha dezhi da zlead en em zieubiñ ken e-keñver politikerezh, ken e-keñver armerzh. Aze c'hoazh e skarzhañ an Emsav danvez blin ar "genel" evel m'emañ en he fillidigezh, ha lakaat a ra en e lec'h danvez oberiek politikerezh ar rezid.

*Carama  
90 fondam*

*Nete  
da welout!*

Gwelout a reer pegen truek eo termenadur ar vroad evel "kenel er ster dangorel". An ober-krouiñ, ober an Emsav, ned eo tamm ebet an tremen bredoniell merket gant G.HERAUD eus ur ster ergorel d'ur ster dangorel, n'en deus netra da welout gant un emskiant a vezañ dibarek, - a zo un astenn d'an hollved eus an "esprit de clocher". Un dispac'h eo, da lavarout eo un urzh nevez a ergorelezh o tiflukañ er bed. N'eo ket kemer Breizh evel m'emañ hiziv hag he c'hinnig d'ar mañsoner, moudenn buzuilh anezhi, da fardañ un Europa Gevreadel; met krouiñ eus ar vro-mañ ur bobl nevez en he rezid, da lavarout eo en he galloud, da lavarout eo c'hoazh en he stadegezh.

*X*

Kement-se o vezañ lakaet, ne lavaromp ket ez eo ar c'hevreadur un diskoulm fall er par etrevroadel. Met a-raok komz eus kevreañ, ez eo mat gouzout petra a vo kevreet, hag ivez pelec'h emañ an nerzhoù a roio an tu da gas ar c'hevreañ da benn.

Petra kevreañ ? Ar c'henelioù "naturel" (stuzegezhel), al lostoù glazarded o tifreताñ blin-ouzh-blin e kornioù ar riezhoù a-vremañ, skubion an Istor ? Pe Stadoù nevez krouet dre zispac'hioù poblet e kement lec'h ma'z eus danvez kevala istorek a-walc'h evit o sevel, - el lec'hioù end-eeun ma wel G.HERAUD e "genelioù" ?

*da Gervais?*

*Lehan*

Pelec'h kavout an nerzhoù da seveniñ ar c'hevreañ ? Er Stadoù kozh, Frañs, Alamagn, troet a bell 'zo gant trevelloù all ? Er c'henelioù o-unan, sanket don e koma o arallekadur ? Pe er Stadoù dispac'hel yaouank nevez krouet e pep korn eus Europa ?

Ar gevreadelourion a rank gwelout ur wech da vat e tremen o uhelvennad dre grouidigezh ar Stad Vrezhon, ar Stad Kembreat, ar Stad Euskarat, kevredigezhioù nevez ha nerzhoù politikel galloudus a-walc'h evit skarzhañ eus Europa un dizunvaniezhoù kozh ha diazezañ ar c'hevread pobloù yac'h a hetont. (10 06 68)

- (1) Diheboell e oa a-hend-all an dezvadur nazi, rak lakaat a rae gwiriañ 'gouenn' an dud, n'eo ket dre savelañ o ferzhioù bevedel, kromozomel (dre ar gwad, mentoù kevrannoù



ar c'horf, h.a.) evel m'he dije goulennet un hentenn ouiziel, met hepken dre gemer sol war varilhoù ar boblañs.

- (2) Teutonouriezh b., tezennoù danzeet en 19t kantved, o lakaat ar bobl alaman dreist ar pobloù all dre berzh he gouenn ha, dre-se, o c'houlenn eviti ar gwir da ren war ar pobloù all.
- (3) Evezh zo da deurel bepred pa droer ar ger gallek culture. Anat eo amañ, pa zaveer d'ar gendestenn hag ivez da venn-ozioù an aozer, n'eus ket anv a seveniñ, met a stuziañ un natur, ur glad. Sl. ivez Emsav 2/5, 6/130; ABANNA, Notennoù a-zivout keal ar stuzegezh, Preder 92-94/45.
- (4) F.ENGELS, Anti-Dühring II.
- (5) Sl. Emsav 5/105, 7/168, 11/290, 13/73. EMVR-20

### DARVOUDOU

#### F.L.B.

Abaoe daou vloaz bennak, da lavarout eo Eost 1966, ez eus paret enskrivadurioù F.L.B. (Talbenn Dieubiñ Breizh) war ar mogerioù er vro. War un dro ez eus bet aozet gwalldaolioù ouzh savadurioù an amaezhierzh gall e Breizh. Da gentañ taolioù arouezennel evel e Sant-Brieg hag en Oriant, neuze, a-c'houde Eost 1967, argadoù-freuzañ; evel-se e voe troc'het ul linenn bellgehenterezh e-kichen Naoned, foeltret un treuzfurmer tredan e-tal Gwened, plastiket ivez Prefetioù Sant-Brieg ha Kemper, ha telldioù stank e pep korn eus ar vro, adal Kemblizieg betek Banaleg, adal Plouzevede betek korn-bro Naoned. Menegiñ a reer ivez ul laeradur danvez-tarzh e Koad Loudieg hag ur skrapadur fuzuilhoù brezel e Kamp al Lu gall e Koadkaden, un harzlamadur pourveziou brezel er Su. Ar gerc'hadenn a reas ar muiañ a vrud e voe hini Sant-Brieg a-enep an 13t C.R.S. (Kompagnunezh Republikana Surentez), ma voe tarvet ar c'harbeti, pulluc'het un niver mat eus an tangirri a oa enañ ha mekaet mat ar re all.

A-berzh piv ez eo bet kaset ar gwalldaolioù-se ? Betek-henn ez eo bet sinet an darn vuiañ anezho gant an F.L.B. e-unan. D'ar sinadur-se ez eus bet ouzhpennet un nebeut luganoù all, evel : "Stourmomp ouzh gwallvererezh an amaezhidi c'hall e Breizh", "Gant kerc'hvellourion an F.L.B. stourmomp ouzh an dalc'hidigezh c'hall e Breizh". War un dro, unan eus atebeion ar Strollad Broadel brezhon e-pad ar brezel-bed diwezhañ, rener ar Bagadoù Stourm neuze, Yann GOULET, en deus embannet e samme kiriegezh an taolioù-se lakaet gentañ dindan renerezh ur c'h-"Kuzul Broadel Breizh Dieub".

En diwezh, ret eo notañ en deus paouezet an F.L.B. gant pep

obererezh abaoe derou ar strafuilh kevredigezhel e Frañs, e miz Mae. Penaos kompren an ehan-se ? Daou arbenn o deus c'hoariet moarvat : ar gwalldaolioù ne gavfent heklev e Breizh er mare-mañ, - evit ar bruderezh ez eo aozet argadennoù an F.L.B. betek bremañ; d'an eil, war var e vefent da gemer ur ster politikel a-geñver gant an darvoudoù gall.

Penaos ez ersav ar boblañs vrezhon ouzh embregadennoù an F.L.B. ? Betek-henn ez eo bet kentoc'h a-du, dreist-holl en abeg d'an enkadenn armerzhel a zo o wastañ ar vro. Ar re yaouank a briz doare sportel an afer : e-barzh skolioù 'zo e Roazhon e tiskouezont estlammiñ ouzh an argaderion. A-hend-all e chom diuntuek danevelladennoù ar c'hazetennoù pemdeziek. War un embannadur micherel evel ar Paysan Breton, ez eur prest da zigareziñ an F.L.B. o vezañ ma ne glask ket ar gouarnamant gall da vat diskoulmañ kudennoù Breizh.

Ar re nemeto a zo savet krenn a-enep da obererezh an F.L.B. zo bet maer Roazhon, FREVILLE, Gall a orin, - a c'houlennas dre ziv wech advagadoù C.R.S., - ivez ar gomunourion c'hall a arnodas kemmeskañ ar gerc'hvellourion gant an nazied; ur voustagadenn heñvel a zeuas eus ar gannaded c'haollour.

Penaos meizañ obererezh an F.L.B. ? Daoust ma wisk ur ster emsavel, - diwanet ma'z eo eus hengoun Gwenn-ha-Du hag an I.R.A., - e chom forc'hellek ar pezh a ro ar strollad kuzh-se da anaout diwar e benn. E luganoù kentañ a denne da re ar gempennourion dre vras, pa ne gaved enno anv nag a vroad nag a rezid, - un dislavar a oa etre an talbenn kemeret, an amkanioù embannet (lakaat termen da wallarver an amaezhidi c'hall e Breizh), hag an araezioù feuls lakaet da dalvout. War a hañval, mar barner diouzh al luganoù diwezhañ, en defe emdroet an F.L.B. war-du un emzalc'h kempoelloc'h.

Bezef pe vezef, rankout a reomp chom gant martezeoù dirak ul luskad dirgel (1) na embann ket e balioù. Gwirheñvel eo e kaletay an F.L.B. e stourm er mizioù a zeu, - laeradur an dafar emgann henn diskouez. Hogen an hentennoù diouto o-unan n'o deus ster ebef hag ar chouanterezh gwechall a reas kalz muioc'h a freuz hep degas netra da Vreizh.

### Displegadedg an 8 Mae

An eil gwech eo ez eus graet e Breizh un displegadedg d'an 8 a viz Mae. Ret eo merkañ da gentañ n'he devez an embregadur netra da welout gant an Emsav, war-eeun da vihanañ. Aozet eo bet gant ar c'hweluniadoù gall : F.E.N. (Kevread an Deskadur-ezh Vroadel Gall), C.G.T. (Kengevread Hollek al Labour), C.F. D.T. (Kengevread Gall al Labourerion), manet estren da gudennoù ar Vrezhoned. War ar marc'had, evit lemel al liv breizhat d'ar muiañ, ez eo astennet an displegadedg d'ar pevar departamant gall e-kefin Breizh. Kement-se a ziskouez mat youl an aozerion



da zerc'hel an displegadeg war dachenn an arc'hadurioù boutin d'ar Frañsizion hep riskladur ebet war-du an tachennoù brezhon a-ziforc'h.

Daoust da ziarbennoù an aozerion avat, he deus ar boblañs e Breizh roet ur ster un tamm mat disheñvel d'an darvoud. Rak, mar'd eo bet piaouet diferadur an ec'hwel hag an dibunadegoù gant ar c'hweluniadoù gall, e teu al lusk eus aozadurioù led-emsavel evel ar C.E.L.I.B. a zo o ren abaoe bloavezhioù ul labour-stlennañ en-dro da armerzh Breizh. Setu perak, a-hend-all, e komz ar C'hallaoued o-unan eus Breizh pa venegont enkadenn ar gounezerezh e Kornog o riez. Setu perak ivez e oa tonket displegadeg an 8 Mae da vezañ intentet evel un darvoud brezhon gant Breizhiz o-unan.

Ar pezh a vefe da wiriañ da gentañ ez eo dregantad al labourerion o deus graet ec'hwel. War a c'haller jediñ n'eus ket en tu all da 50 % eus an dud e Breizh o deus diskroget diouzh o labour d'an 8 Mae hevlene.

Al luganoù distaget hag ar skritelloù dalc'het gant an dibunourion a zle bezañ dezrannet ivez dre ma roont un alberz eus tro-soñjal ar werin er mare-mañ e Breizh. E Roazhon da skouer, e-lec'h ma kejas kouerion, studierion ha micherourion, - arabat ankouaat emañ ar gêrbenn e-kreiz un tiriad war c'hreantelaat, ez arvested ouzh tri seurt luganoù. Da gentañ e teue gerioù-stur arc'hadurek, micherel ha c'hweluniadel rik : "Frankizioù d'ar c'hweluniadoù", "Holl unanet", "Charlot des sous", pe renkadel-politikel : "Citroen faskour". D'an eil, garmennoù o tennañ da zarvoudoù gall ar mare (reuz ar studierion) pe o taveiñ da ersav ar bolis da geñver displegadegoù diagent : "C.R.S. S.S.", "Dieubit hor c'hamaladed", "D'ar skol ar griped", "Studierion ha micherourion unanet". D'an trede, luganoù oc'h ober anv eus kudennoù ar bobl vrezhon : "Labour d'ar Vrezhoned", "Gourc'hwelioù e Breizh", "Breizh a fell dezhi bevañ". A-hervez e vije bet garmet ivez "Breizh trevadenn" hag "F.L.B.", met e meur a dro o deus ar genurzhierion c'hweluniadel emellet evit lakaat tevel al luganoù brezhon ha zoken argas an dibunourion o garme, - e Sant-Brieg da skouer e voe nac'het ouzh ur bagadig paotred a zouge ar Gwenn-ha-Du enkerzhout en ambrougadeg. Anat eo o doa atebeion lec'hel ar c'hweluniadoù kemennadennoù resis war ar poent-se. Ar c'hemennadennoù-se kenkoulz hag al luganoù brezhon a dizhas diglorañ daoust dezho a verk a-walc'h e lusk al labourerion e Breizh war-du ur stumm bennak a emskiant vrezhon.

#### "Dispac'h" e Frañs

Dic'hortoz eo bet ar reuzioù c'hoarvezet e Paris hag e Frañs adal an 10 Mae 1968. Er penn kentañ ne voe nemet un emsavadeg studierion broudet gant gwelout ar bolis o terc'hel ar Sorbonne, konnaret goude-se gant harzidigezh ha barnedigezh darn eus o

c'hamaladed paket e-kerz ar c'habaduilhoù. Evit lakaat divac'hañ  
 ha didamall o c'henseurted e aozas studierion Baris ur rumm  
 displegadegoù war ar straed a zisoc'has diouzh an noz da daol-  
 ioù-freuz kalet e meur a lec'h eus ar Quartier Latin. Fardet e  
 voe bardelloù, diouzh henvoaz dispac'herion Baris er c'hantved  
 tremenet, ha lakaet an tan warno, tanflammet tangirri arsavet  
 a-benn stankañ an tremen ouzh ar boliserion. Diouzh o zu e  
 vannas ar re-mañ, anezho kerreizhourion, C.R.S. ha gwarded  
 vonedus, greunadennoù-daeraouiñ brezel hag a skoas garv war an  
 displegadegerion. Padal, daoust d'ar freuz ha d'ar reuz ne  
 voe ar fourgaserion evit dero'hel ar straed pell amzer e nep  
 lec'h. Ne voe ket arveret armoù brezel gwirion a nep tu a-hend-  
 all ha rak-se ivez ne voe nemet gloazidi, - lakaet er-maez tri  
 den, ur studier e Paris, ur micherour e Sochaux hag ur c'homiser  
 e Lyon, met bep taol e degouezhioù o tennañ d'ar gwallzarvoud.

War a hañval, o deus bet an darvoudoù un derou hag un dedro  
 emdarzhel rik. Ret eo notañ evelato e oa e-touez ar studierion  
 bagadoù stourm kenurzhiat ha gourdonet mat hag a ziskouezas o  
 ferzhioù leviataerion e-doug ar c'hrogadoù gant ar bolis. Izili  
 ar P.C.F. (Strollad Komunour Gall) n'o deus bet perzh ebet e  
 luskadur pe e grevusadur ar stourm; er c'hontrol, gronnadoù-  
 igoù pellaourion a gleiz, anveliourion dezho bannieloù du,  
 trotskiourion, sinagarourion, paotred Luskad an 22 Meurzh  
 atizet gant ar studier alaman COHN-BENDIT, o deus c'hoariet  
 roll an daranell hag an trelusker en derou ha bewech ma kinnige  
 an "dispac'h" soetiñ. Dizamant-tre ec'h en em gunujennas an  
 div gevran, diouzh an hengoun komunour, - ar bellaourion o  
 tamall d'ar gomunourion c'hall bezañ treitourion d'an Dispac'h,  
 ar re-mañ oc'h ober atahinourion hag avanturourion eus ar  
 studierion emsavet.

Heuliet e voe ar P.C.F. gant ar c'hweluniadoù micherour dre  
 vras, war-bouez un nebeut arlivioù, - ar C.G.T. o chom evel  
 just ar muiañ diouzh al linenn erbedet. Disheñvel-bras e voe  
 ersav ar c'hweluniadoù studierion ha kelennerion, - mar meneger  
 ar re bennañ anezho da nebutañ, eleze an U.N.E.F. hag ar S.N.E.  
 Sup. (C'hweluniad Broadel Kelennerion an Uhelzerez). E nep mare  
 n'o deus dianzavet oberoù ar bellaourion, ha bepred o deus  
 klasket desachañ ar braz eus o izili da ziskouez kengredegezh  
 gant ar gorzhourion (2) handeet; ouzhpenn-se o deus klasket  
 kanoliañ an emsavadeg ha reiñ dezhi ur ster en tu all d'an  
 arc'hadurioù skolel ha micherel pe da vennadoù nac'hel ha  
 dibal an anveliourion. Sammet o deus a-vloc'h kiriegezh kement  
 gwalldaol erounezet gant ar re "enragés", ha war un dro  
 embannet ez eo aner klask adreizhañ ar Skol-veur ma ne adreizh-  
 er ket, ma ne zispac'her ket, ar gevredigezh ez eo ar Skol-veur  
 ur skourr anezhi.

Koulskoude, nesamkaniou ar c'hweluniadoù-se a oa diraez  
 emrencrezh ar Skolioù-meur, ha dre an hent-se o lakaat etre  
 daouarn paotred an "dispac'h". E meur a lec'h e voe klasket



dizorniañ kelennerion hag amaezhidi diskred warno a vezañ kil-stourmerion. Ar mennad-se da reiñ hec'h emreolerezh d'ar Skol-veur a voe e devoud krouidigezh kengorioù niverus hag oberiant, enno studierion ha kelennerion o kenlabourat, kefridiet evit prientiñ dezvad ha frammadur ar Skol-veur nevezet. E lec'hioù 'zo e kemeras micherourion yaouank perzh en dalc'hioù labour.

Er-maez eus an dachenn skolel avat, ha daoust d'an diskleriadurioù-pennaenn, ne hañval ket e voe prientet e nep lec'h ur raktres da gemer ar galloud politikel dre an nerzh. Er Sorbonne dalc'het gant ar studierion e voe foranet eurvezhioù hag eurvezhioù noz ha deiz da brezeg, da vreutaat ha da gendaelañ. N'eus disoc'het evit c'hoazh danvez kemm ebet e framm ar Stad C'hall nag en ensavadurioù he c'hevredigezh. An tagadennoù ouzh ar gevredigezh-veveziñ, a ziskoueze ur preder speredel a-berzh ar bellaourion hag ur youl da dremen en tu all d'an dispac'hioù-kent, zo bet tamallet garv gant marksourion "reizh-kredennek" ar P.C.F. hag o deus paouezet. A-hend-all ne hañval ket an danvez dispac'herion bezañ aet en tu all d'ur reizhiad kourmoulek a-fet ar gevredigezh nevez e oant mennet da zevoudañ.

En ur c'heñver hepken evelato e oa ali an holl : evit diskar gouarnerezh de GAULLE ha diazezañ ur gouarnerezh sokialour en e lec'h. Ar c'haderezh arveret oa gounit kenlabour ha skoazell ar gostezenn gleiz dre vras ha dreist-holl hini ar gomunourion. Da gentañ penn e nac'has atebion ar P.C.F. hag an aozadurioù ledkomunour en em wallveskañ gant ar studierion. Kondaoniñ a rejont brizhdivezouriezh COHN-BENDIT hag e harperion da skouer. Ouzhpenn-se e tifennjont ouzh o bagadoù en em gevrediñ gant al luskadoù studierion ha kemer perzh en o displegadegoù. Kevredadurioù lec'hel etre studierion ha micherourion a c'hoarvezas hogen dezho e voe kiriek tud yaouank a hiniannoù hepken.

E gwirionez e voe ar c'hinnig kenskoazell-se etre micherourion ha studierion un dro da anataat rannadur ar gostezenn gleiz c'hall. Strolladoù hag aozadurioù c'hweluniadel 'zo a glaskas er c'henlabour gant ar studierion an tu da zistremen ar P.C.F. hag ar C.G.T. war o c'hleiz ha d'o digenvezañ, - ar P.S.U. hag ar C.F.D.T. da skouer. Evel-se e voe lakaet an hu war anv SEGUY, sekretour-meur ar C.G.T. en ur vodadeg aozet gant ar studierion ha pellaourion a gleiz, ha graet un treitour anezhañ.

D'ar mare-se c'hoazh ne oa ket resizet doare ar saviad politikel. Er brezegenn a reas o tistreiñ eus Roumania e reas van de GAULLE da grediñ ne oa d'ober nemet kempenn ar Skol-veur ha framm an embregerezhioù dre ar perzhiadekaet evit lakaat an dizurzh da baouez. Hañvalout a rae aspediñ youl vat ar boblañs dre ur referendom. Ken gwan all e voe prezegennoù ar C'hentañ Maodiern POMPIDOU. Setu ma kredas ar P.C.F. hag e gevredidi e oa prest de GAULLE da blegañ ha marteze d'en em dennañ. Ober a reont o soñj sammañ war o c'hont emsavadeg ar studierion ha luskañ a-enep d'ar gouarnerezh gaollat a seblante gwanaet-mat da heul an emsavadeg-se, un argadadeg vras war dalbenn ar c'hwel-

uniadoù. Ar re-mañ a savas a-du gant an ec'hwelioù bet loc'het ent-empdarzhiek diwar lusk ar fourgas er Quartier Latin hag, a-barzh pell, e voe seizet ar vuhez armerzhel eus Frañs en he fezh. En hent-se ez adkave ar P.C.F. e roll levier e-touez ar vicherourion enebet ouzh ar galloud kevalaour. Da gentañ ne voe roet d'an ec'hwel hollek nemet amkanioù micherel : ar goproù, lec'h ar c'hweluniad en embregerezh, ar C'hedskor. Met tamm-ha-tamm, e-ser an displegadegoù-meur aozet e Paris hag e greant-lec'hioù all e tinodas arc'hadurioù all, politikel ar wech-mañ : kimiad de GAULLE ha savidigezh ur gouarnamant a c'halloud poblel. Kaout a rae d'an holl edo de GAULLE o vont da reiñ e zilez : steuziet e oa eus Paris... Padal, ar c'hontrol eo a c'hoarvezas : er brezegenn verr ha taer a reas en endervezh an 30 Mae e nac'has kilañ dirak an dispac'h ha diskouez a reas bezañ mennet da arbennañ outañ dre an nerzh diouzh ret. War un dro e tivode Kambr an Dileuridi hag e kemenne dilennadegoù.

Diwar glevout mouezh nerzhiek o fennsturier e savas kalon en-dro d'ar c'haollourion, - lesanvet "kostezenn ar c'hrenañ". D'o zro ez aozjont un displegadeg vras war ar straed e Paris ma voe dastumet meur a gant mil a dud, ganto bannieloù gall, a-wechoù amerikan pe saoz. War-lerc'h hounnezh e voe displegadegoù gallgar ha gaollgar all e kêrioù bras Frañs.

Heverk e voe heuliadoù ersavadenn de GAULLE hag an ambrougadegoù bras a-du gantañ. Da gentañ e paouezas renerion ar gostezenn gleiz a dagañ Penn ar Stad ent-foran. Ehanañ a reas ar studierion gant o displegadegoù. Pep mennad politikel a steuzias eus diskleriadurioù ar pennoù c'hweluniad. Ar P.C.F. a zilezas mennoz al leviererezh poblel diframmet dindan wask ar vicherourion evit adkemer lidoù republikan ar stourmadenn a-raok an dilennadegoù. Tamm-ha-tamm e voe skoulmet emglevioù etre ar c'hweluniadoù micherour ha patromed ar greanterezh. Fin e voe d'an ec'hwel e pep lec'h e Frañs.

#### Diazez kevredadel an darvoudoù.

Un devoud eo e c'hoarvez emsavadegoù studierion en holl vroioù a stuzegezh c'hreantel abaoe un nebeut bloavezhioù : er Stadoù-Unanet, e Polonia, e Yougoslavia, e Tchekoslovakia, en Alamagn, en Italia ha zoken e Spagn. Ret eo notañ da gentañ ez eo aet buan da get difreterezh ar studierion er riezoù ma oa ur veli greñv gant ar Stad, betek-henn ac'hoel. Hep mennout koazhañ pep tra d'an devoudoù kevredadoniel, ez eur aotreet, dre berzh hollvedelezh an anadenn pergen, da veizañ betek ur poent "dispac'h" ar studierion evel ur argerzhad kevredadel.

En em gavout a reomp evit gwir dirak ganedigezh ur c'hendere nevez er gevredigezh arnevez : dekkementet eo bet en ur ober 30 vloaz niver ar studierion er broioù greantel. D'an eil, disheñvel eo ivez orin ar studierion a-vremañ : dont a reont eus kendereoù ar werin hag ar vourc'hizion vihan. Dre-se ec'h en em santont mui pe vui estrenion er sevenadur krouet gant bourc'hiz-



ion. Ret eo lakaat ouzhpenn e vez lemmet santidigezh an arall-ekadur gant ar savlec'h graet d'ar studierion er broioù frankizour : hir eo ar studioù d'ober a-raok kemer renk werc'hel er gevredigezh; dre berzh pennaenn ar frankkevezañ, ene ar reizhiad kevalaour, n'eus nemet un dregantad izel a studierion o tegouezhout gant dibenn o studioù ha, devoud o kreskiñ c'hoazh an diasurded, un darn hepken eus ar bagad rouesaet-se a vez e-tro da gavout gourc'hwel. Aes eo kompren ez a neuze arc'hadurioù ar studierion en tu all da gudennoù ar Skol-veur : evel kendere nevez en o deus kudennoù dibarek da ziskoulmañ a-benn en em savelañ, met puan e rankont merzout ned eo ket ar c'hudennoù-se evit bezañ diskoulmet hep na ve eilpennet ar reizhiad kevalaour hag, en tu all dezhi c'hoazh, ar patrom stuzegezh disoc'het diouti ha degemeret dichipot gant ar broioù greantel all, ar riezoù sokialour evel an holl. Evit souezhus ma'z eo ar gondaonadenn graet gant ar studierion eus ar gevredigezh-veveziñ, ez eo neoazh an termen reizhpoell eus dezrannadur saviad ar studierion er riezoù greantel, ha pa ve ar re-mañ lec'hiet er bloc'had amerikan pe er bloc'had soviedel (3).

Un diazez kevredadel zo enta da emsav ar studierion : diwan ur c'hendere nevez er gevredigezh c'hreantel. An diwan-se avat a laka da sevel kudennoù a ya kalz en tu-hont da vevennoù ar gevredadoniezh, peogwir ez emplegont ur burutelladur hollek eus diazezoù ar gevredigezh c'hreantel hec'h-unan. Dispac'hadegoù ar studierion a c'hell enta bezañ komprenet evel ragazon un dispac'h gwirion eus ar bed greantel. Na ankouaomp ket avat ez eo an dispac'h ur grouidigezh kent bezañ un distruj.

#### Ar saviad politikel e Frañs e Mezheven 1968

An taolioù-freiz kentañ zo bet kaset da benn gant strolloù-igoù dispac'herion gourdonet mat, hogen o labourat hep kenurzh ebet, davit amkanioù hiniennel, gant ar ratozh nemetañ da grouiñ un emgav dispac'hel a ve korvoet da c'houde evit teurel d'an traoñ ar gevredigezh kevalaour.

Korvoet eo bet, e gwir, an emgav krouet, met n'eo ket gant e grouerion. Gant piv neuze ? Gant meur a gostezenn war un dro ha lerc'h-ouzh-lerc'h.

Da gentañ, c'hweluniadoù ar studierion hag ar gelennerion o deus tennet dioutañ an nerzh o deus ezhomm evit adreizhañ ar Skol-veur, da lavarout eo reiñ dezhi hec'h emrenerezh hag, en ur ober se, he zennañ a-zindan reolerezh ar Stad vourc'hiz ha kreñvaat enni ar galloud c'hweluniadel.

D'an eil, ar c'hweluniadoù micherour o deus tizhet diframmañ, dre hent an ec'hwel hollek, muioc'h a spletoù dindan ur sizhun eget e dek vloavezh a arc'hadurioù darnel.

D'an trede, ar strolladoù politikel a gleiz. Met aze e ranker digeriñ ur gont, rak n'eo ket echu ar jedadurioù. Ar P.C.F., ar P.S.U. hag an F.G.D.S. a lammas e koulz, gant ar c'hweluniadoù micherour, en tren lusket gant ar studierion. O amkan a voe da

gentañ diskar de GAULLE ha staliañ en e lec'h ur gouarnamant a unaniezh kleizad. Padal e tilezjont buan o mennad goude an 30 Mae.

Perak seurt kiladenn ken prim ?

Un arbenn kalvezel a c'haller degas da gentañ. Evit tennañ korvo eus un emgav dispac'hel e ranker pe vezañ e brientet, pe da nebeutañ bezañ e rakwelet. Ar gostezenn gleiz c'hall n'he doa graet nag an eil nag egile.

Met an arbenn kalvezel-se a zleer displegañ d'e dro dre zegas arbennoù donoc'h. Rak penaos kompren e ve tremenet ar Strollad Komunour, strollad an dispac'h marksour dre dermenadur, hep prientiñ na rakwelout an dispac'h ? Eeun eo ar respont. Dibabet en deus ar P.C.F. koulz hag ar strolladoù kleizad all eus Frañs hent ar c'hempennerezh a bell 'zo. Da lavarout eo o deus dilezet hent an dispac'h kevredigezhel. N'emañ ket en hor mennad studiañ amañ perak en deus ar Strollad Komunour Gall emdroet en doare-se; a-walc'h e vo deomp menegiñ en ur vont un nebeut azonoù eus an emdroadur-se, evel da skouer an aktoù a vrogarouriezh c'hall a ra ar gomunourion eus Frañs abaoe an eil brezel-bed hag er miz-mañ gwashoc'h eget biskoazh. Ar "Marseillaise" hag ar banniel triliv zo deomp, emezo. Re eeun e ve gwelout aze kaderezh hepken, evel m'hor bo tro da ziskouez en un niverenn all. Bezet pe vezet, kaderezh ar Strollad Komunour zo e bal tostaat distroñs, dre an hentoù demokratek, d'ar galloud-Stad. Muioc'h en deus da dennañ neuze eus e emzalc'h kempennelour, kompez ha kerreizh, dirak yoc'h an dilennourion eus ar c'hendereoù-etre, eget n'en dije eus un emzalc'h dispac'helour gant gronnadoùigoù distabil an tu kreiz pellañ.

Arbennoù heñvel a c'hoari e kaderezh ar P.S.U. daoust ma tisoc'hont gant gweredoù kontrol. Ar strollad-mañ en em harp penn-da-benn war ar gronnadoùigoù pellaour, oc'h erbediñ d'o heul dispac'h ha feulster evit kemer ar galloud. Ur c'hlaoustre a ra a-du gant youl dispac'hel ar yoc'h. Fellout a ra dezhañ derc'hel al lec'h istorek dilezet gant ar P.C.F.. N'en deus netra da goll oc'h ober se, o vezañ ma n'en deus framm a-bouez ebet er vro. Ouzhpenn-se ez eo un alc'houez evit an dazont kaout ar studierion a-du gantañ. En ur bed o kefredelaat emañ ar spi gant ar gefredourion.

N'eo ket dav komz eus an F.G.D.S. ha n'eus anezhi nemet dastumad digenurzh strolladoù a gleiz war o diskar ha na reont nemet dedennañ mouezhioù emgefreak voterion gozh 'zo.

Dre vras enta n'eo ket deur ar gostezenn gleiz klask kemer ar galloud re vuan e Frañs.

Abegoù all zo moarvat evit ma'z afe kleiziz c'hall war o fouez. Harperion de GAULLE zo e gwirionez harpet warnañ, evel ma tiskouezas anat o emzalc'h a-raok ha goude an 30 Mae. Petra c'hoarvezo gant an deñved pa vo bet skoet ar mesaer gant e ankou ? Ha gouest e vint da herpel c'hoazh ouzh bleizi kleiz ?



Seul ziaesoc'h e vo ma n'eus bet eztaolet biskoazh kelennadurezh resis ebet diwar-benn kevredigezh gant nikun eus harperion de GAULLE.

Tri disoc'h a c'haller empennañ d'an enkadenn c'hall war verr pe hir dermen :

a) Pe de GAULLE a zeuy a-benn da dreiñ ar vicherourion a-du gant an adreizhañ a ray er gevredigezh, - dre louzoù burzhudus ar perzhiadekaat (4).

b) Pe e tirollo dizurzhioù nevez hag e kemero ar P.C.F. ar galloud dre an nerzh evel m'en deus damglasket ober e dibenn Mae. Neuze avat e ranko diazezañ e c'halloud dre ur brezel diabarzh dezhañ azlammoù etrevroadel dirakweladus, - brezel Vietnam a c'hell reiñ an ton anezho.

k) Pe neuze e tizho ar P.C.F. gant harp ar gleizidi all ha war-bouez sammañ un darn vat eus talvoudoù ar sevenadur bourc'h-iz, kemer ar galloud dre an hentoù dezvel. Notomp, a-fet talvoudoù, e c'hallfe ar P.C.F. kenderc'hel mat-tre gant ar politikerezh gaollat a "zishualded vroadel" hag a vroadelouriezh impalaerel dre vras.

Dre an arbennoù hon eus displeget uheloc'h ez eo an trede disoc'h an hini c'hoarvezusañ.

E gwir, studi an heuliadoù a zeu da startaat ar meno-se. Rak, dre het pe dre heg, ez eo kaset an armerzh gall war hent ar sokialouriezh, - ar sokialouriezh-Stad da nebeutañ. A-walc'h eo d'ar c'hweluniadoù leviet gant ar P.C.F. bezañ aozet un ec'hwel a deir sizhun evit degas kemmoù grevus er reizhiad armerzhel. An astal-kenderc'hañ kenkoulz ha kresk ar goprou a zevoud endeo gwaskoù mone'hwezhus, hag a zegaso ar gouarnant, evit parraat outo, da waskañ war an embregerezhioù. Da heul, ez ay d'an traoñ un niver mat a embregerezhioù bihan hag etre. A-se e kresko a-dizh tolpadur ar greanterezh etre un nebeut firmoù galloudus; ar re-mañ avat a risklo-buan pe vuanoc'h dindan reolerezh ar Stad, ken ma teuy ar sokialouriezh da vezañ an diskoulm nemetañ abred pe ziwezhat. Gouzout avat petra chomo neuze eus mennadoù-diazez ar gomunouriezh d'ar mare-se e politikerezh ar P.C.F. a ve un afer all.

- (1) Dirgel ag., diwar-benn ur strollad, un nerzh-lu nann anavezet gant ar galloud o ren, o labourat e kuzh hag a-enep d'ar galloud-se peurliesañ.
- (2) Korzhour g., oberer dispac'hel a zo e gefridi en em silañ er boblañs a-benn devoudañ ur c'heflusk a dalvezo d'an dispac'h.
- (3) Sl. Emsav 13/19, Un amkan nesoc'h...
- (4) Sl. Emsav 9/244, Reiñ d'al labourer perzh e frouezh e labour.

KEMENNADENN A-BERZH POELGOR-LEVIAÑ EMSAV

An Teodeg, kelaouenn ar gevredigezh Dugelez Breiz, 93-Les Lilas, he deus gouestlet he niverenn 2-68 (Ebrel-Mezheven 1968) d'ar Mouvement Politique Breton. Hervez raklavar an niverenn e ve deuet "les responsables des différents mouvements" da ziskleriañ enni ar pezh ez eo pep hini anezho.

Dindan an talbenn Emsav, pajenn 7, e kaver ur pennad sinet gant Goulven PENNAOD.

Evit parraat ouzh pep kemmesk e roomp da c'houzout n'he deus ket Emsav kefridiet nag aotreet an Ao. Goulven PENNAOD da embann en hec'h anv ar pennad-se war An Teodeg. Ned eo ket an Ao. Goulven PENNAOD ezel eus an aozadur Emsav. EMVR-22

KEMENN A-BERZH S.A.D.E.D.Seizhvet Bloavezh Skol

Padout a ray Seizhvet Bloavezh Skol Strollad an Deskadurezh Eil Dere adalek an 29 Eost 1968 betek an 24 Ebrel 1969.

Digor eo ar marevezh-enrollañ etre an 25 Mae 1968 hag an 25 Eost 1968.

Daouzek rummad kentelioù zo war ar roll-kelennadurezh. Ar gwirioù-enrollañ zo 40 F dre rummad. Evit enrollañ, skrivañ da :

S.A.D.E.D., 30, Place des Lices, 35-RENNES.

Arnodennoù 1968

Pedet eo ar skolidi o deus dibabet an eil dalc'h-arnodennañ da gas o goulvennoù-enskrivañ a-raok ar 15 Gouere 1968, - en abeg d'an ec'hwelioù ez eo bet ampellet eus 15 devezh deiziad-klozañ ar prantad-enskrivañ.

Aozet e vo an eil dalc'h-arnodennañ evit 1968 e Gourin da geñver Devezhioù Studi an Deskadurezh Vroadel (10-25 Eost 1968).

EMVR-23



